



## Skol-Hañv Fichenn-skoazell 2025

Gouzout a reomp ne zesker ket ur yezh dre heuliañ kentelioù nemetken, hag e ranker lakaat anezhi da vevañ er-maez eus metoù ar Skol-Veur, pe ar greizenn stummañ. Gouzout a reomp ivez pegen talvoudus eo evit ar gelennerien brezhoneg kenderc'hel ingal da studiañ ar yezh, dre heuliañ devezhioù-studi ha stajoù hiroc'h lec'h ma c'hellont gwellaat o barregzhioù, ober anaoudegezh gant brezhonegerien all, divizout war o micher, o skiant-prenet, bevañ ur sizhunvezh pe ouzhpenn e brezhoneg penn-da-benn. Ken gwir all eo evit an holl re a vez o labourat e bed ar skolioù, kasourien, Gwazoured tiriadel, ATSEMed, AESHed... ha d'an dud a zo berr an arc'hant gante e vefe domaj chom dirak dorioù KEAV abalamour d'un diouer a arc'hant (studierien hep gopr, tud o klask labour).

Evit skoazellañ ar stajidi-se eo prest KEAV d'ober dezho un distaol war priz ar sizhunvezh staj heuliet e KEAV war o amzer vak ha war o c'houst : studierien Master 1 ha 2 ar c'helenn divyezhek en o studioù, ar gelennerien, ar gasourien, an ATSEMed, an AESHed, ha kement hini o labourat e metoù ar c'helenn divyezhek

### Neuze :

- Tud dilabour, studierien hep gopr, kelennerien brezhoneg ha Master 2 war ar brezhoneg ha tud all o labourat e metoù ar c'helenn brezhoneg 350-50=300€

- studierien M1 hag Aotreegezh war ar brezhoneg, ATSEMed, AESHed, kasourien: 300-50=250 €

Evit ma c'hellimp heuliañ gwelloc'h ar goulennoù skoazell, e c'houlennomp diganeoc'h leuniañ al lodenn amañ dindan ha kas testiñ ho statud.

Da gas da [keav@keav.bzh](mailto:keav@keav.bzh)

Anv & Anv-bihan .....

Chomlec'h .....

Kod-post ..... Kêr .....

Pellgomz .....

@ Postel/lekpoz.....

### STATUD

Distao 50€	Distao 100€
<input type="checkbox"/> Dilabour <input type="checkbox"/> Studier hep gopr <input type="checkbox"/> Kelenner brezhoneg <input type="checkbox"/> Master 2 war ar brezhoneg <input type="checkbox"/> O labourat e metoù ar c'helenn brezhoneg	<input type="checkbox"/> Studier M1 <input type="checkbox"/> Aotreegezh war ar brezhoneg <input type="checkbox"/> ASEM <input type="checkbox"/> AESH <input type="checkbox"/> Gwazour tiriadel <input type="checkbox"/> Kasour

### Evit an dud o labourat er skolioù :

Publik  Katolik  Diwan  Un aozadur all (resisaat : .....)

Kentañ derez  Eil derez

Anv ha chomlec'h ar skol m'emaoc'h o labourat

.....  
Anv ha chomlec'h ar skol-stummañ m'emaoc'h o studiañ

.....  
Deiziad ha sinadur

